

L. Le Strat

(Pluniav 1865 – Pluniav 1954) Beleg

Guerzenneu Breih-Izel (bet embannet e 1931)

Cheñchet eo bet an doare-skriva tamm-pe-damm.

Faziou moulla a zo er skrid orin.

E brezoneg Gwened ema ar skrid-se. Bez' helloh impljoud ar geriadur-mañ : Guillevic – Le

Goff : Geriadurig Brehoneg-Galleg, bet embannet gand Emgleo Breiz.

Taolenn

Kenniget d'en Eutru Tréhiou : Eskob Guéned

Er Grillan hag er Velionenn

Er Vran hag er Luhern

Er Chignan hag en Ejon

En deu véajour

Un azen gwisket ged krohenn ur Leon

En derùenn hag er gorzenn

Er veitouréz hag er podad lêh

Er bleiz hag er hi

Ur garell oeit éen ur sulér

Un den avarisiuz kollet dehou é drézol

Er pod houarn hag er pod douar

Er bleiz hag en oén

En dén koh hag é vugalé

Er héré hag en Eutru

Er labourér hag é vugalé

En deu jao

Er mèùour hag er penmoh

Er marù hag er hoédour

En azen hag er hi bihan

Er sitrouillenn hag er vézenn

Er geneùenn hag en deu chikanour

En diù glom

En azen hag er hi

Er yar présiuz

Er hroédur hag en néh estig

Un êlig deit àr en douar

En êl hag er hroédurig

Un aviz mad

En deu vrèr hag er goukou

Er jardrinour hag er vugalé

En “trein“ dihentet

Er rah a gêr hag er rah a ziàr er mêzeu

En tu mad ag en neañ

Er mambreu hag er galon

**Kenniget d'en Etru Tréhiou
Eskob Guéned**

Etru Eskob, o ! gwir Breihad
E gar kement ièh un tadeu
Doh-hui hiniù a galon vad
E kennigan me gwerzenneu
Eidoh emant ur merch neùé
A men doujañs karantéuz.
Plijet genoh gobér dehé
Un degemer madalehuz !

Er Grillan hag er Velionenn

En amzér ag en hañv,
Hemb arsaù, noz ha dé,
E kane er Grillan,
Ha bourruz é kavé.

E-kreiz en deverañs,
Ankoéheit mad en-doé
A cherrein é viùañs
Eid en amzér goudé.

Mez tremén e hra béan¹
En imbad, en hoari ?
Chetu deit er gouiañ
Ha deit er gerteri !

Ne gavé mui nitra
De rein d' é gargusenn,
Na preñued, na bara,
Nag un tamm kelionenn.

Er Grillan disoursi,
Gouli² kaèr é voelleu,
Kalz a hoant n' en-doé mui
De lared sonenneu.

Da di er Velionenn
Eañ oeit, er hèn Grillan ?
De houlenn ur hrañnenn
Avied torrein é nan.

« Me 'lar doh a-vremen,
A galon, emé eañ,
M'ho péo, en est-men,
Diù hrañnenn eid unan. »

Mez er Vélionenn gri'
E reskont d' er Grillan :
« Bara n' eh-eus chet mui !
Petra hrèh-hui d' en hañv ?

Pe oé kaèr en amzér,
Eid komz ged gwirioné,
Er-mêz heg en tier
Me 'gané noz ha dé. »

éA ! ya, hui e gané

¹ béan : buan

² Gouli : goullo.

Pe oé red labourad :
Amañ, krollet eùé.
Kenavo ! yéhed mad ! »

*Grillan, n'ankoéhet ket,
Mez dalhet choñj erhad
De bep unan ér bed
Ema red labourad.*

*Ha hui 'ouiet eùé,
Mélionenn digalon,
Cheleuet hed truhé
Goulenn er beurerion !*

Er Vran hag er Luhern

Intron ar Vran àr ur barr azéet
E oé geti un tamm krampoéh lardet.
Detit en eutru Luhern de dremen édandi,
Er vlaz ag er hrampoéh ez a betag é fri
Hag er gwél anehou e ra hoant d'e galon ;
Mez penaoz her lemel a-bigos er pichon ?
Er Luhern, a-viskoah karget a fineseu,
Ne chom ket pèll amzér de gavouid penn d'é dreu
Ar-lerh en-dout lipet é veg,
El-men é komañs é bredeg :
« Deùeh mad doh, intron er Vran !
E lar eañ ged é voéh dousañ,
Na braù hiniù ho kavan-mé !
Pe vehé ket, poéh braù eùé,
Ne vehé ket, pèll tro-ha-tro,
Ur pichon sort genoh ér vro. »
Intron er Vran neuzé
Ne bad mui ged er joé.
Eid diskoein d'er Luhern penaoz éma hé boéh,
Hi 'zigor ur beg braz, e laosk hé zamm de goéh.
Er Luhern he skrap béan, e lar d'er Vran goudé :
« Ur mèlour, gouiet mad, e zo lipour eùé,
En diskein, Intron gêh,
E talv un tamm krampoèh. »
Er Vran kouard ha méhuz, e lar, mez devéhad :
« Ne vein let mui lorbet a-vamen d'an herrad. »

*Liès mad én ur mélour
E kavéet un treitour.*

Er Chignan hag en Ejon

Un dé ur chignanig, un éjon e wélas
E pérad er héotenn é-kreiz er pradeu glaz.
Braz e oé en éjon ha distér e oé eañ,
Distér èl un ui yar, rag ma oé ur chignan.

Neoag er loenig peur e lar én é galon :
« Perag ne vehen-mé ker braz èl un éjon ? »
Più en-dehé kredet ? Er jalouzi eùé
E-mésk er chignanned e gavér gwéhavé.

Ata`er chignan-men a jalouzi karget,
Hag ohpenn kement-se, én é choñj aheurtet,
Um laka de foèùein evid brasaad é gorvig
Mez kaer en-deus gobér, chom e hra bihannig.

« Laret dein », emé eañ d' é vredér chignanned
E saùé drest en deur o fenneu de selled,
« Laret dein, bugalé, mar don ker braz èldou³. »
Er ré-men e hoarhé, e hré goab anehou.

« Ker braz èl un ejon ! Kollet é ho spered.
E-taldou, foèùnourig, nitra ne seblantet. »
Hag er chignan amoet e zalhé da foèùein. »
« Hama, emé eañ hoah, nitra ne vank mui dein ? »

« Nitra ! ne spiret ket, e laré é vredér.
E-tal ur loen ker braz ataù é oh distér.
E-raoh en ingalein, labour e gaveet
Ha kaer ho-po gobér chignan e chomeet. »

Neuzé lan a gounnar chetu eañ hoah ur wéh
E seùel, é foèùein, é termal hemb dichuéh.
Mez o ! glahar ! dré fin astennein é grohenn
Er foèùourig e chom ramblet àr en dachenn.

*Edan en istoer-men é splann ur wirioné
Anaùet mad ér bed, mez ankouéheit eùé :
En eb e fall dehou lemél ag e wir stad
Birüikin àr en douar n'hellouit chañs vad.*

*Mar doh ganet chignan, chomet er péh ma oh,
Ha ne houlennet ket doend de voud brasoh.
Rag allaz ! pe glaskér um seùel ré ihuel,
Liéz a wéh kentoh é koéher ré izel.*

³ èldou : eveltañ

En deu véajour

Job Talhouet ha Yehann Kerlé
E yé o-deu d'er foér, un dé,
Chetu kavet de Job Talhouet
Un dra bennag édan é droed.
Eañ e sell, ha petar e wél ?
Ur yalh a-blad é-mésk en deil.
Béan éma skrapet, digoret
Ha lan a eur é tisko bet.
« Avedom-ni na péh ur joé ! »
E lar kentéh Yehann Kerlé.
« Ne laret : *aveidom-ni*,
Emé en all, hui e fari !
Laret kentoh : *aveid on-mé*,
Ha hui 'laro er wirioné. »
Goudé, hemb diviz é kerhant.
Mez 'benn un herrad é wélant
Ur vandenn laéron é toned/
« Kollet om, e lar Job Talhouet.
Ur fall a fer *aveidom-ni* ! »
« Laret kentoh : *aveidoh-hui*. »
E reskont dehou é gonsort :
« Rag nen dé tamm erbed er sort,
A oeit pelloh, Yehann Kerlé. »
Chomet é-unan kaer neuze,
Er peur-kêh Job e zo tapet
Hag e yalh eur dohtou laèret.

Reit d'er re all lod ag ho joé ;
Rag hous-unan, ér leuùiné,
Hous-unan, é veet eùé,
Pe 'z ey en déieu a dristé.

Un azen gwisket ged krohenn ur Leon

Un azen en-doé keméret
Krohenn ur leon àr é gani⁴
Hag en dud e ridé spontet
De gaved en nor ag o zi.
Ne ouian ket é pé féson
Ur pennig a skouarn er lon⁵
Er-mêz en-doé trézet.
Chetu eañ anaùet
Aveid boud ur gwir azen,
Hag un ton arall d'er sonenn !
En hani e laké tuchant
Oll en dud de grénein
D'er gêr bremen éh a liant,
Taoleu bah àr é gein ! »

*Ur paotr yaouank hiniù en dé,
Un tammig pan édan é fri,
E saù é benn ihuel d'er lué,
Um gav finnoh aveid hani.
En achimant ez é gwélet
Nen dé nemeid ur hêh amoed.
N'her havér ket mui ur paotr fin,
Mez un azen ha nitra kin.*

⁴ gani : gein.

⁵ lon : loen.

En derùenn hag er gorzenn

Un dé en derùenn vraz
D'er gorzenn e laars :
« A-dra-zur n'hellet ket
Trugarékaad en Eutru Doué
En-)devoud ho kroéet
Ker bihan ha ker gwan eùé.
Ar ho parrigeu moén nitra n'hellet kemér ;
Un évnig aveidoh e zo e drboul lein en deur
Ho laka de blégein izél ho pennig peur.
Na dishañval on dohoh-hui, tamm tra distér !
Sellet me fenn saùet ken ihuél en amzér
Ma touchan 'gozig bet' en Neañ !
Sellet mem barreu ker eldan
M'en-dé goleit dehé en douar pèll tro-ha-tro !
Kaer en-deus en àùél huéhein enné gwerso ;
En àùél e dremén ha me chom plomm ataù.
Ha hui, korzenn, ne hret 'meid plégein hemb arsaù.
Ahoèl ha pe vehèh édan mem barreu deil,
Ged joé m'ho kwarnehé doh taoleu en harnan.
Mez chetu hui durheit a bep tu d'en àùél :
Truhé em-eus dohoh, o ! korzenn ken bihan. »
« Arsaùet ; O è derùenn,
A geméer truhé dohein, »
E respont er gorzenn.
« N'em-eus chet léh d'um glemmein,
Rag me Hroéour hag hous hani,
Dein-mé kerkoulz evel d'hoh-hui,
E vadeleh hemb par en-deus eùé diskoeit.
Euruz on én tachad, léh ma on bet lakeit.
Me houér a-drest en douar ne saùan ket ihuél ;
Me houér é vransellan ha pe wéh en àùél ;
Ne vern, goap aveidon eh-eus léh de zoujein
Er gurun é kornal, en àùél é huélein ;
Plégein e hran liéz, mez torrein ne hran ket.
Ha hui betag bremen plomm en ho saù perped,
Derùenn ihuél, diwallet mad
A goéh un dé bennag a-blad ! »
Embérr goudé chetu arriù un taol harnan.
Er Gorzennig e bleg he fenn
Ha chom e hra plomm en Darhuenn.
Neoah kriùoh pé ktiù en àùél kounnaret
Er barreu dél e huéh ataù,
Hag en Derùenn ihuél a-blad e zo koéhet
Dirag er Gorzenn en hé saù.

Avedi chom én hañv saù, pléget ;
Hui e goého, mar um saùet !

Er veitouréz hag er podad lèh

Perrot er veitouréz, ur pod douar àr hé fenn
Lakeit dehi sonn-mad é-kreiz un dorchenn bren,
E yée de huerhein lèh d'er gêr ag en Oriant.
Evél ur plah yaouank kerhed e hree liant
Rag hé-doé kéméret en dé-sé dillad skañv :
Hé boteu lér izél, hé broh koton moéнан.
Perrot é-pad en hent én hé choñj e gonté
En argant ag er lèh ; getou hi a brené
Un nebeudig uieu de lakaad de horein.
« A-dra-sur, emehi, ne vo ket diêz dein
Desaù é-tal me zi bandenneu poñsined.
Gwir é, gellein e hrey er luhern o laéred ;
Mez alkent treu er-walh e chomo hoah genein
Eid prenein, mar karan, ur pennmoh de lardein.
L'her lardo fonnabl-mad, hmb dispign kalz a vrenn.
Me 'doucho, p'her gwerhein, ur somm argant a-benn,
Ha mar lakaan me choñj, perag n'em-behé ket
Ur vuoh ohpenn ér hreu, ur lé bihan halet,
Ur lé hag e saillo joéiuz é-tal e vamm ? »
Perrot eùé joéiuz e saill édan hé samm :
Er podad lèh e goéh... ha kenavo neuzé
D'er vuoh, d'er poñsined, d'er pennmoh ha d'er lé !
D'er gêr é has en-dro er Veitouréz chifet
E lezel àr hé lerh hé fodad lèh skuillet,
Ha ged méh é laras en istor d'hé fried
En dañjér a reseù àr hé hein un tamm koed.

Hoantaad madeu e zo êz deoh,
O haved e zo diêsoh,
Rag liéz en treu e hoantet
E zo pelloh eid ma choñjet
Er péh e zo gwellañ dalhmad
E zo hoantaad a galon vad
Ma tégoého pep tra bamdé
El ma plijo d'en Etru Doué.

Er bleiz hag er hi

Ur hêh bleiz e oé ken tret⁶
Ma oé séh èl un tamm koed ;
Nde pé 'meid éskern ha krohenn
Goleit ged ur vil a bañnenn.
Er bleiz-men e gav un dé
Ar é hent ur pikol ki
En-doé tehet de valé
Er parkeu pèll doh é di ;
Lard e oé, biskoah lartoh
Hag ur bañnenn flour dehou.
Choñj er bleiz, nitra surroh,
E vehé bet krog ennou
Hag he lakaad a-dammeu.
Mez eañ en-doé eid um zihuenn
Dent luemm én é chajelleu.
Er bleiz enta, soublet é benn,
E ya de gaved er hi.
« Eutru, na gaillard oh-hui ! »
E lar dehou ged resped.
« Ker gaillard èl on, mar karet,
E véet », e reskont er hi.
« Kuiteet ho koédeu, rag enné
Ne gavér 'meid poén, melkoni,
Kerteri liésañ eùé. »
« Pegement ah ho kansorted
E dremén ur vuhé kaled
Ha ne gavant bouid de zébrein
Nameid hemb arsaù é skrapein !
Deit genien-mé, m'her lar deoh
Ha hui 'vo kalz eurusoh. »
« Mez petra um-bo-mé d'hobér ? »
E lar er bleiz. » - « Labour distér
Emé er hi, harhal de noz,
Pe vo en dud ged o repoz
Eid gwarn en ti doh ar laéron.
D'er mestr ha d'er serviterion,
Mar a wéh én dé, gobér chér,
Hui hell boud sur ér féson-sé
Hui e gleuo komzeu tinér
Hag ho kwalh a friko eùé
E vo taolet deoh de zébrein. »
Er bleiz, e kleued kement-sé,
Ged joé n'hell parad a ouelein.
E voned ged en hent neuzé
Eañ 'wél goug é gansort kignet.
« Petra é en dra-men ? », émé eañ.
« Marsé er chadenn e zougan

⁶ tret : treut.

E zo kaoz d'er péh a wélet. »
« Staget oh enta, mar a wéh »,
E lar ar bleiz, « ha n'hellet ket
Du-hont, du-men rideg dalbéh,
Na moned, d'er léh ma karet ? »
« Naren, mez ne hran forh erbed. »
« Hama, gwéll é genein-mé
Eid friko me liberté.
Ne garehen ket hé holl
Memb eid kaved in teñzor. »
Ha hemb àr é lerh selled,
Oeit er bleiz én-dro d'er hoed.

Ur garell oeit én ur sulér

Ur garell treud ha moén, dré un toullig distér,
En-doé gellet, un dé, moned én ur sulér.
Un herrad kent é oé bet klañv.
Ennou é-kreiz er joé vrasañ,
Débrein e hras hé gwalh ken ne oé stambouhet.
Più e laro en treu e oé bte dismantret
Ged er gomér, en déieu-sé ?
Ha lard e oé kement neuzé
Ma oé tostig ront èl ur voul.
Mez trouz e gleu doh er vañgoér
Ha chetu-hi é klask en toull
Eid moned kuit ag er sulér.
En toull n'en-dé ket mui
Frank er-walh aveiti,
Ha hi e dro hag e zistro.
« Dré-men neoah em-eus paset.
Eméhi, n'en-deus chet gwerso.
Kredein e hran, n'um drompan ket. »
Ur rah, doh hé gwéled é poén,
E lar : « Perag boud soéhet ?
Neuzé ho pouelleu e oé moén
Ha bremen émant karget.
Treud e oeh, me hère komér,
Ha pe oèh deit er sulér ;
Red é ma véet tred⁷,
Er-mêz ha pe yéet.

⁷ tred : treud.

Un den avarisiuz kollet dehou é drézol⁸

*Argant e zo tra didalvé
Mar he vé groeit getou implé.
En dud avarisiuz, ne choñjant 'meid tolpein.
Mez a betra emant pinvidikoh, laret dein,
Mar ne hrant implé erbed
Ged en argant o-deus tolpet ?
Er peurrañ dén e zo neuzé,
A dra sur, ken pinùig èlde.
Eh an de lared un istoér
Em-eus disket pe oén bihan,
Hag on de wéled sklêr
Ema gwir er péh e laran.*

Boud oé un dén avarisiuz
En-doé un trézol présiuz,
Ur somm argant biskoah brasoh,
Ne oé ket eañ mestr, mez kentoh
E drézol e oé mestr dehou.
Ha ne viùé 'meid aveitou.
En é bark en-doé eañ kuhet
Hag é galon eùé kevred ;
E tébrein hag é ivet,
E voned hag é toned,
Ataù n'en-doé choñj erbed
Meid ged é argant karet.
Oll é blijadur e oé
Ged é drézol noz ha dé,
Ha liéz eh é d'her gwéled.
Mez un toullour ag er hornad
E oé un dé doh her solded
Hag e geméras en néhiad.
Er hêh dén, entrenoz, e gav en néh gouli
Ha chetu eañ kentéh é leskel taolieu kri',
E tennein àr é vlèù èl unan diskiant.
Ur béajour e bas é-taldou àr en hent :
« Petar 'zo degoéhet ? »
E lar hennen soéhet,
« Kollet eh-eus marsé
Ho moéz ? Ho pugalé ? »
« Nepas, é hunuad eañ, argant em-eus kollet. »
« Argant è emen ahoél ? » « En toull-men e wélet. »
« Mez, amoet, perag eùé
Her lakaad en toullig-sé,
De guhed hous argant pésort choñj eh-eus bet ?
Pe véh hoah brezél, mez brezél n'en-deus chet.
Ha ne oé gwell deoh mil gwéh
Her lezel ér gêr dalbéh ?

⁸ kollet dehou é drézol : kollet dezañ e deñzor.

Hous argant é-taldoh
E vehé bet êsoh
Hen impléein de bep termén. »
« De bep termén ; Ola !
En argant e dremén
Fonnaploh eid mé ‘ta.
Ennou biskoah ne douchen. »
« Hama, genoh m’her goulenn,
Perag e ouelet-hui neuzé ?
Argant e zo tra didalvé
Pe ne vé groeit implé getou.
Mar ne douchéh jamez ennou
Ur mên lakeit é léh ma oé
E hrey er memb vad deoh bamdé. »

Er pod houarn hag er pod douar

Tostig en eil d'egile
En ur memb ti um gavé
Ur pod houarn hag ur pod douar.
Er hentañ d'en eil e lar :
« Dam d'hobér un dro balé
Skuéhein e hrér 'pad en dé
Ag er mintin azéet. »
« Moned genoh ne vennan ket »
E reskont er pod arall,
« Rag torrein e hran êz-mad
Ha doujein e hrah he gwall
Ar en hent é rudellad.
Mez hui hg e zo kriùoh
N'eh-eus nameid moned.
Me léh-mé e zo kentoh
Amen é korn en uéled. »
Er pod houarn e lar neuzé :
« N'eh-eus nitra de zoujein
Rag mé vo doh ho kosté
Ataù prest d'ho kourantein. »
Er pod douar e sent kentéh
Hag o-deu oeit ag o léh
Um laka de rudellad.
Mez allaz ! 'benn un herrad
Er pod douar ged er stokeu
E zo draillet a dammeu.

*Kerhet ged tud sort genoh ;
Rag mar det ged ré kriùoh,
Digoéh e rey deoh hemb arvar
Er memb gwall ged er pod douar.*

Er bleiz hag en oén

En ur riolennsklêr un oénig pendeñved
E oé soublet é benn eid torrein é séhed.
Chetu arriù ur bleiz hanter varù ged en nan :
Péh ur joé aveitou kaved un oén bihan !
« Petra e hrez-té, moj vil ? », e lar eañ kounnaret,
« Te ‘gousi en deur-men ha pe vennan ived !
Aveid ur penndeñved, hardéh hous un nebed⁹,
Ha té béou emberr kement a hardéhted ! »
En oénig peur skontet én ur grénein e lar :
« Eutru, plijeet genoh distañnein ho kounnar.
Gobér jénemant deoh biskoah n’em-eus choñjet ;
Mez deit on d’er wah-men eid torrein me séhed.
Ivet em-eus c’en diaz pèllig mad a zohoh,
Ha n’hellan ket kredein éma en deur villoh. »
« Villoh, eme er bleiz, villoh he havan-mé.
O ya, m’az anaù mad ; ur braù a loen ous-té !
Me oer, er blé arall e-teus men dikriet. »
« Penaoz ? emé en oén, ne oén ket hoah ganet.
Eh on hoah é ténein. » - « Più é neuzé ? te vrér ? »
« E gwirioné, eutru, n’em-eus na brér na hoér. »
« Ne vern, er ré bennag ataù e hra poén dein.
Oll, chas ha bugulion, é vennant me lahein.
Té béou aveité, rag chuéh on é andur ! »
Kentéh àr en oénig er loen gouiù dinatur
E zigor é veg braz, her has getou pèlloh
Hag hen débr a-dammeu hemb chikañnal muioh.

*Ar en douar-men ged er hriüañ
Ema er rézon liésañ.*

⁹ nebed : nebeud.

En dén koh hag é vugalé.

Un tad édan merùel en-doé tolpet un dé
En-dro dehou é vugalé.
Tri baotr e oént, tri baotr é-mesk er ré kriùañ.
« Sellet en dra-men », emé eañ.
Hag eañ ‘ziskoé dehé ur gordennig skloumet
Ha greit ged teir nédenn joéntet.
« Più ahanoh ho-tri e hello hé zorrein ? »
Er hohañ e ansey, mez kaer en-deus chachein,
Er gordennig ne dorr ket.
En eil ag er baotred e grog énni àr-lerh ;
Eitou eùé poen gollet.
Er yaouankañ d’ é dro e denn a-bouiz e nerh,
Mez hemb gobér nitra.
« Degaset hi enta
Dein-mé, e lar en tad :
Mé hello-mé êz mad
Doned de benn ag hé zorrein. »
Chetu eañ doh hé diskloummein ;
Goudé hemb lakaad oll é nerh,
Ar é hoarigeu eañ e denn
Hag éma torret leh oh lerh
Peb unan ag en teir nédenn.
« Hama, hui wél, bugalé »
E lar eañ dehé neuzé,
« Unañnet étrézoh é veet kriù perped,
Pe vo red deoh um zihuenn.
A-hanah é kontrel, mar doh dispartiet,
Ez e vo doned de benn.
Kenavo, bugalé, birùikin n’ankoéhet
En aviz e ran deoh é-raog kuitaad er bed. »
Er vugalé e lar, én ur skuillein dareu,
N’ankoéheint ket jamez é zévéhañ komzeu.
Emberr é varù o zad. Madeu e chom geté.
Mez er lodenn vrasañ e zo édan delé ;
Er ré en-doé argant prestet
E houlennt kentez boud péet.
Prozeu e zo groeit unan àr-lerh en all.
De gentañ en tri brér e zalh éneb d’er gwall,
Rag ma oent d’er memb tu, rag ma oent unanet.
Mez tabut étrézé ken pèll e zo saùet,
Hag en arbenn ag en dañné
Chetu torret er garanté !
Tra mil gwéh ankinuz : dré er gwed unanet,
Dré en treu ag en douar émant dispartiet.
Er péh en-doé laret en tad
Ez a neuzé de voud gwir-mad,
Rag en dud a lezenn,
Perped tud didruhé,

E oé deit béan da benn
A zsimantr o dañé.
En tri brér neuzé devéhad
E choñj é komzeu fur o zad,
E choñj én teir nedenn joentet,
En teir nedenn dispartiet.

Er héré hag en eutru

Ne gavér ket en eurusted
En inourieu nag én danné,
En istoér é yam de lared
E zisko dem splann kement-sé.

En eurusañ dén àr en douar
E oé Jdan Huisant er Héré
Evel un estig àr er barr
Joéiuz e kané tro en dé.
A-dal d'é brenestr é chomé
Un eutru braz goleit a eur.
Hanan, én desped d'é zanné,
Ne gavé ket, èl en dén peur,
En-dro dehou en eurusted :
N'hellé na kanein na kousked.
Mar dégoéhé dehou cherrein é zeulagad
De dermén er goleu dé,
Jean Huisant, akourset de seùel mintin mad,
E kanein hen dihouské.
Hag en eutru um glemmé
Ma n'hellér ket, evel en ivaj hag er bouid,
Prenein er housked eùé.
Eañ e hra d'er hanour dond un dé d'her havouid.
« Me hêh Jean Huisant, emé eañ,
Laret dein : pégement e saùet hui er blé ? »
« Er blé, pégement e saùan ? »
E reskont en arall, ne gontan ket èl-sé.
Ataù, é lar eañ é hoarhein,
N'en don ket dén aveid tolpein.
Er péh e hounian
E ya genein dé ha dé ;
Kontant on mar gwélan
En achimant ag er blé
Heb mankein a nitra. »
« Hama, laret enta \
En un deùeh petar houniet hui ? »
« A ! revé, mar a wéh muioh,
Mar a wéh eùé bihannoh.
Propig er-walh e vehé men gouni
Kenevé ur vostad déieu
E zo rekiz mired dajmad.
Mez en hanter ré a houilieu
E bar dohom a labourad,
Hag en eutru person, d'er sul én overenn,
E gav hoah gwahavé ur gouil bennag ohpenn. »
En eutru a hoarhas é kleued kement-se
Hag e laras kentéh d'er farsuz a géré :
« M'ho lakey, mé, kontant bremen :

Kaset genoh er hant skouid-men,
Cherret int én hous armenér
Hui o havo pe vo d'obér. »
Chetu men dén neuzé bamet ;
Hañval é doh unan semplet.
Eañ e gred gwéled àr un dro
Oll en argant e zo er vro.
Kuh é hra é srézol neué
Edan er vangoér ag é di ;
Allaz ! é joéiusted eùé !
A sonenneu ne oé ket mui ;
Kollet dehou é voéh, kollet é leuiné !
Ar-lerh en dout kavet ur vammenn a dristé,
Pèll doh e zeulagad
Ema oeit er housked !
N'hell ket chom un herrad
Hemb bouljal, hemb sellad.
De noz mar kleu trouz erbed
Ged ur rah bennag é saillal,
Eun¹⁰ en-deus a vould laeret,
Hag eañ um laka de grial.
Dre fin andur kement, Jean Huisant e zo chuéh.
Ha pa wél é eutru, eañ e ya d'her havouid :
« Rantet dein, emé eañ, me housked ha mem boéh,
Ha keméret en-dro ho milliget kant skouid ! »

¹⁰ Eun : aon.

Er labourér hag é vugalé

*« Labourér, hemb doujein ho poén
N'en-deus surroh danné. »*

El-men é komzé, kent tremén,
Un tad d'é vugalé.
« Memm bugalé, e laré eañ,
Chetu deit me hours devéhañ ;
Eh an en-dro de gavoud Doué.
E-raog merùel me garehé
Dizolein deoh un dra sériuz.
Diwallet mad a huerhein de hani
En dachenn-men ker présiuz,
Rag un trézol e zo kuhet énni ;
E pé tachad, ne ouian ket !
Mez, bugalé, mar labouret,
Hui e gavo, nitra surroh,
En trézol-sé devéhatoh.
Aret mad ho parkeu, ho poén ne zoujet ket.
Ne faot ket ma chomo korn na korgnel erbed
Hemb boud troeit ha distraoeit, hemb boud sellet peurwéh. »
Ar-lerh marù en dén koh, é vugalé kentéh
E gomañsas arad é kement korn e oé.
Er gomenant chomet geté,
En douar gwell labouret e ra dehé muioh
Ha ken pèll emant pinùikoh.
Argant nag eur kuhet
En douar ne gavant ket ;
Mez en tad, kent moned d'er bé,
En-doé mennet diskoein dehé
Penaoz én ur labour kreduz
Eh eus un trézol présiuz !

En deu jao

Deu Jao àr un dro um gavé
E hobér hent un dé.
Unan, Jao un eutru a gêr,
En arall, Jao ur labourér.
Hennen, àr e gein ur sahad,
E gasé gwenéh d'er marhad,
Ha, hemb selled a du erbed,
Pléget é benn, e yé pozet.
Jao en eutru, joéiuz, koutant,
E oé gétou ur samm argant,
Hg é toug é samm présiuz,
E benn e saùé randonuz,
En ur lakaad é gloh bihan
De son doh é houg hemb dihan.
Mez chetu é-tal en deu lon¹¹
Dégoéhet ur vandenn laeron.
Er ré-men e oé gwél geté kaved argant ;
Doh er Jao pinùikañ a-benn um gemérant.
'Trézéd é grov neuzé ged eun taoleu koutell,
Er lon peur hanter-varù e goéh àr er bratel.
Eañ e lar én ur huanadein :
« D'er Jao arall e zo genein
Ne vé groeit droug erbed,
Ha me 'zo mé lahet ! »
« Kansort, e reskont en arall,
Liéz mad é arriù er gwall
Gedc er ré saùet ihuél ;
Gwéll é chom ataù izel.
Pe vehéh bet èldon Jao ur labourér douar,
Ne vehéh ket bremen é verùel ged glahar. »

¹¹ lon : loen.

Er mérour hag er penmoh

Un dén é fozell un hent-praz¹²
‘Hed e gorv e oé astennet,
Goloeit a frank betag é fas
Hqag é zillad hantér renget¹³.
Boud ‘oé bet a vintin ér foér,
Ha ‘benn en noz er bambochér
En-doé karget mui pod mad
Eid ma hellé charréad.
En toull fozell enta koéhet,
Ged é gorvad é oé chomet
En ur stad biskoah truhékoh.
Boud oé éno teil, breinaté...`
Hag arriù kent pèll ur penmoh
Um laka de furchal énné.
« Kerhet kuit a-vamen, lon vil. »
E lar er mèùour ged kounnar.
Kentéh er pemoh àr é hoar
Um denn un tammig a-drechil,
Hag e chouk àr é ziardrañ.
En ur seùel e benn neuzé,
« Hui ‘lar dein “lon vil“, emé eañ ;
Ne hran ket kas a gement-sé.
Gwerso, é ouian mad, ur lon braù n’en-doa ket ;
Mez boud zo loned vil estroh deidon ér be.
Hag amen, p’ho kwélan.
Hoant em-eus de lared
N’en don ket er villañ
E-mesk en oll loned.
Rag m’ho kav é gwirioné
Lousoh hoah eidon-mé.
Sellet é pé sort stad
Eh oh hui, mèùour peur,
Koéhet ged ho korvad,
E-kreiz er fank, en deur !
Sellet er baùitell e zo doh ho keneu
Hag ho fri ru’ ha glaz ged kement a lommeu
Eh eus lonket én ho puhé !
Hui ‘lar eh oh roué er bed...
O ! ya, me ‘gred, ur péh a roué,
Ur roué ér fank astennet !
Hous inean, n’ é welan mui
Ar ho fas é splannein ;
N’en-doh nameid lusteri,
Rag sé gwéll é genein
Mèùour louz, boud ur pemoh
Eid boud un dén sort génoh.

¹² hent-praz : distagadur “hent braz“.

¹³ renget : ? “roget“ ?

Er marù hag er hoédour

Krozet édan ur fagoddenn bonnér,
Ur hêh koédour a hers hag a vizer,
A baseu bèrr ha difonnig,
E yée de gaved é lojig,
Rag muioh hoah àr é ziskoé
Er samm ag en oed é bouizé.
Tuchant, ged er boén, er glahar,
N'hell mui derhel àr é ziùharr,
Eañ e daol é véh koéd, e ziskuéh un herrad,
Ha kentéh é komañs diskarg é galonad.
« A ! perag, e lar eañ, n'em-eus kavet ér bed
'Meid poénieu, mizérieu ha trebilleu perped ?
Aveid gounid bar d'er voéz, d'er vugalé,
En don ag er hoédeu em-eus hwezet bandé,
Ha hoah dré fin hwézein mar chéren blankigeu
E oé rekiz o rein d'er reseùour taoseu !
Er marù e gavan bourrusoh
Eid er vuhé-men a valloh.
O ! Marù, lan a zoustér,
Deit béan d'em dégemér ! »
Er Marù e zo arriù :
« Petra e houlennet ? »
E lar eañ d'en dén biù »
« O è Marù, e reskont er hoédour
Genoh ne vennan ket moned.
Mez, mar karet, deit d'em sekour
De sammañ en-dro me béh koed. »

*A-bèll er marù e vé galùet ;
« Deit béan, o ! marù, skuéh on ér bed. »
Mar ven neuzé tostaad,
Dehou kentéh é vo laret :
« O ! Marù, arriù oh ré abred,
Gorteit hoah un herrad ! »*

En azen hag er hi bihan

*N'aséam ket gobér
Er péh ne jaoj ket dem,
Rag ur poén, un amzér,
Sur mad e golleemb,
Ha mar ne gredet ket
M'ho péd de cheleued
Petra oé dégoéhet
Ged un azen amoet.*

Eañ 'doé mennet un dé
Kemér skwer àr er hi
Eid boud chérabl eùé
Doh er mestr ag en ti.
« Er hoh tammig ki-sé,
Emé eañ kounnaret,
Muioh aveidon mé
E zo ataù karet.

Mé labour mad neoah,
Hag er mestr, er vestréz
E ra dein taleu bah
Ken e gamman liéz.
Petar e hra henneh,
Avedi boud mignoned ?
Rein é bat¹⁴, er peurkêh !
Ha dehou vé poket !

Mar faot ker bihan sé
Aveid boud istimet,
M'her groey forh êz eùé,
M'her groey, ne vankein ket. »
Hag un herrad goudé,
Chetu eañ é tostaad
En ur momant ma oé
E vestr én imur vad.

Dehou bet er balog
Er skouarneg e saù
E garneu diaraog
Ged ur penn sonnen vraù !
« Tuchant mé ziskoey deoh,
E lar er mestr fachtet,
Gobér ardeu braùoh,
Azen dall, lon drujet. »

En taoleu 'bah neuzé
E goéh stank àrnehou

¹⁴ bat : ? galleg ? « troad ».

Ha me 'lar : gwaharzé !
Gwaharzé aveitou !
Perag eùé lakaad
Choñjeu sod en é benn ?
Ha perag ankoéhad
N'en dé 'meid un azen ?

Er sitrouillenn hag er vézenn

*Kement tra groeit ged Doué
Ar en douar hag en né¹⁵
E zo groeit mad, nitra surroh
En istoér-men hen diskoey deoh.*

Ur labourér, Matao anùet,
E yée d'er park àr-lerh é bred
D'obér en-dro ag é vléad.
Ché eañ arriù, 'benn un herrad,
Er hrienn, édan un erùenn
Dirag ur gaér a sitrouillenn.
A vo soéhet n'hell ket parad
E wéled en erùenn mézad,
Ya, mézad, fréh ker bihanig
Ha p'en-deus àr ur blantennig
Ur fréhenn vraz, ur sitrouillenn !
N'hellé ket moned en é benn
En-deus ur fréhenn ker bihan
Ur huéenn ag er ré vrasañ,
Hag ur fréhenn ker ponnér
Ur blantennig ken distér.
« Amañ en-deus manket en Eutru Doué,
E lar Matao én ur seùel e skoé,
Ar en blantennig-men lakaad ur sitrouillenn !
Mez gwell e oé kentoh hé lakaad én erùenn,
Ha stagein doh er blantennig
Er vézenn-men ker bihanig.
El-sé, d'em choñj, en treu e vehé bet plénnoh :
N'en don ket mé Matao aveid Doué abilloh,
Mez goap àr-zé neoah mar n'en-deus ar Hroéour
M'hen galùet gwéharall eid moned d'her sekour ! »
Kentéh Matao àr er hrienn
Um astenn doh troed en erùenn.
Ha goudé m'en dé astennet
En bérr-amzér éma kousket.
Chetu neuzé un taol àùel,
E wéhein àr er barreu dél.
Ar é fri é koeh ur vézenn...
Ha men dén dihoiusket a-benn,
Eañ e gav àr é valog,
Doh é varù chomet é krog,
Er vézenn diskaret.
E fri e oé kignet ?
« Petra 'zo, emé eañ, gwédein e hra me fri !
Sellet, alkent, sellet ! Na brùet en hoari !
Mez un hoari arall e vehé bet gwélet
E-léh er vézenn-men, pe vehé bet koéhet

¹⁵ né : neñv.

Ur sitrouillenn
Ag en erùenn !
Doué n'en-deus chet mennet
Ma vehen bet lahet.
Bremen é komprenan perag er sitrouillen
E zo àr en deileg é-léh boud én erùenn ;
Bremen erhad é wélan :
Oll en treu groeit ged Doué
E zo groiet ag er gwellañ. »
Ha Matao d'er gêr neuzé
En ur ganein a galon
D'en Eutru Doué mélasion.

Er geneùenn hag en deu chikanour

Deu berhindour en-doé kavet un dé
Ar en hent praz ur geneùenn-galvé :
Sell, emé int, ur geneùenn !
Hag é selled doh er fréhenn
Un deurén e z a én o beg,
Hag e zivir doh o dent
Unan anehé béan e blég
Eid hé cherrein àr en hent ;
En arall a-benn kaèr her pous
En taol àr é grabonneu.
« Gorteit, emé eañ, me lapous
Mar kavez-te mad keneu
N'o havan ket mé fall eùé.
Chetu petra e choñjan-mé :
En hani en-deus kentañ penn
Taolet é sell àr er fréhenn,
Hennéh hembkin hé lonko
Hag en arall o sello. »
« Hama, e reskont er hansort,
Mar behé ur rézon sort-sé
Ur lakehé de voud akord.
Me wél-mé splann, trugéré Doué. »
« Ha mé, e lar en arall,
Ha te 'gred é on-mé dall ?
Er geneùenn em-eus gwélet
En ha¹⁶ raog-te, peur-kêh skornet. »
« Skornet ! Mé ! Tuchant,me hostiz,
Tuchant me ya de ziskoein dis¹⁷
Mar dé men dorn skornet,
Nag ha pehé gwélet
Er fréhenn em raog mé,
Ataù é gwirioné
Mé em-eus hi santet kentañ. »
Etrézé gwah d'er hoah chikan
E-pad ma oent é kasein ton
Chetu arriù àr en dachenn
Er Juj a beoh ag er hanton :
« Petra (zo ? « , emé eañ a-benn ;
Hga en deu chikanour
E gomz ag o afer.
« Mad », e lar er Barnour.
Kentéh eañ e gemér
En é zehorn er geneùenn,
Hé feut hag e lonk er voudenn
Dirag en deu maoed
Bamet doh her selled.

¹⁶ ha : da

¹⁷ dis : dit.

« Bremen ne vo ket mui chikan,
E lar eañ dehé goudé ;
Chetu ur pok de beb unan
Ha laret hoah trugéré
Pendégwir n'eh eus chet mizeu ! »

Lenour, mar karet me cheleu
Dirag er Justis ne yéet
'Meid bihannañ ma helleet !
Pégement a dud aheurtet
En-deus o madeu dismantret
E prosézal en eil doh egilé ?
Liéz é larer, ha gwir é :
En hani e houni e goll ?
N'en doh-hui enta hantér foll
E voned é Justis
De zispign èl-sé ho madeu ?
Evel en deu hostiz,
Petra ho-po-hui ? Er pokeu :
Ged en dud a lézenn
E chomo er vouidenn.

En diù glom¹⁸

Diù glomig um garé én ur feson tinér.
Unan anehé, chuéh ér gêr,
E lakaas én hé choñj un dé
Moned d'hobér un dro-valé.
En arall e laré dehi :
« Me hoér, petra e choñjet hui ?
Moned de rideg pèll doh er gêr
Ha me lezel me-unan kaèr !
Ankoéheit béan kement-sé,
Rag, me hoér beur, kredet mé,
D'er ré um gar evel om-ni
Ema kaled en disparti
Ken euruz om un-diù kevred !
Gorteit a-hoél ma vo paset
Er gouiañ kri', er fall deieu ;
Gorteit amzér er bokéteu !
Pe véet pèll dohein,
Ne hrein 'meid huanadein ;
Me chonnj hous héliou dalhmad,
Me laro : « Me 'zo-mé erhad,
Mez pnaoz éh a ged me hoér ?
Ema édan er fall amzér,
Hemb nitra de zébrein marsé !
Ged ur jiboésour didrué
Un dé bennag e vo lahet !
Chomet genein enta, chomet ! »
Er homzeu-sé ker kaloneg
E douchas er gêh fraouilleg.
Mez béan é toublas àrnehi
Er hoant de wéled bro :
« Keméret confort¹⁹, eméhi,
Abred e vein én-dro,
Red é beajein gwehové ;
En neb n'en-deus nitra gwélet
Nitra n'hellou lared eùé.
Me 'gonto deoh, me hoér garet,
Er bourrsuañ neùétedeu
Ur blijadur lan a zoustér
E gaveet doh me cheleu. »
Kenavo neuzé en diù hoér
E laras en d'egilé²⁰
En ur chuillein paod a zareu.
Er veajeréz hembdalé
A-drest er gwé, er mañneieu,
D'ur vro arall en-deus neijet.

¹⁸ glom : goulm.

¹⁹ confort : bet skrivet evel-se er skrid orin.

²⁰ d'egilé : fazi "d'eben"

Kent pèll e koéh ur barrad glaù.
 Hé diùaskell e zo glubet ;
 A neijal éma red arsaù ;
 Ne agv aveid dichenn
 Nameid ur goh derùenn,
 Un herrad édan er barreau,
 Séhein e hra hé fluenneu.
 Ha hi én-dro d'er lùé,
 En ur park a-gosté
 Ur glom arall hé-deus gwélet
 E-tal un nebeud gran stréuet.
 Ha deit hoant dehi kentéh
 De neijal betag er léh.
 Boud 'oé éno laseu kuhet :
 A-benn ema louiet, tapet
 Er laseu e oé brein,
 Ha dré fin pigosein
 Eh eus moaïnd dehi um denn,
 Mez koll e hra mar a bluenn...
 Un cdra gwah de zoñjien :
 Chetu kentéh ur spaloér
 Arnehi é pladein ;
 E ziùaskell digor kaèr,
 ER glomig pèll dohté
 E neij é-raog, kemb koll amzér :
 « Saovet on alkent, eméhi,
 En ur zichenn àr ur hoh ti. »
 Mez un avrekaod a zeg vlé
 -Er vugalé 'zo hemb truhé –
 E voud geti eun taol mên
 Ken ne dé bloñset he fenn.
 Neuzé er gêh véajeréz
 Hantér varù, hantér maheignet,
 E zo he halon lan a hloéz
 En devoud hé bro dilézet.
 A hers hag a vizér,
 Hé diùaskell koéhet,
 Distroein e hra d'er gêr
 Devad hé hoér garet.
 Na braset é o joé, o leuiné,
 A p'arriùant en eil get egile²¹ !

*Mar det, Bretoned, d'er hêrieu,
 Béan é kaveet mizérieu
 El er glomig ag en istoér !
 Hga un dé devad ho predér,
 Allaz ! én-dro hui 'zey eùé,
 Mez maheignet korv hag iné ;
 Kollet ho-po nerh ha yehed,*

²¹ egile : fazi : eben.

*Kollet ho-po er fé.
Laret dein : pésort Bretoned
E veet-hui neuzé ?*

En azen hag er hi

Gourhemenn er Hréour
E lar dem um sekour
En eil hag égilé.
Eneb d'er lézenn-sé
Un azen aheurtet
En-doé, un dé, péhet.
N'en-deus chet fall galon
Neoah, er peur-kêh lon,
Mez un tammig ema penneg
Ar un dro m'en dé skouarneg,
Ur wéh e véajé
Goleit é gein a bannérieu ;
E vestr hen helié,
Er hi e oé geté o-deu.
Arriù e hrant é-tal ur prad,
Er mestr hernet um daol a-blad
Eid gobér un hun kousked.
Hag en azen é péred
De gentañ er hi e sellé,
Mez deit oé hoant dehou eùé :
« Kansort, emé eañ d'en azen,
Pé blijehé genoh dichenn
Eid ma hellein kemér
Me mérenn er banér ! »
En arall e gavé mad
Er heotenn ag er prad
Ha koll amzér ne venné ket.
« Gorteit, me mignon, e lar eañ,
Ken ne vo er mestr dihunet ;
Emberr é saùo, e gredan. »
Ha kaer en-deus klemmein
D'er hi peur éma red yunein.
Chetu ur bleiz nañneg
E tiboug ag er hoed
Hag er lon skouarneg
E arsaù a béret.
A-benn é huch d'er hi :
Mez er hi ne voutj ket,
« A pe vo dihunet,
Er mestr e z ey d'ho tihuenn. »
E reskont eañ d'en azen.
De hortoz, par ma hellet,
Ridet, kansort, bréchennet ;
Ho karneu e zo houarnet mad.
Mar da er bleiz ha tostaad
Draillet dehou é chajell,
Taolet eañ àr er bratéll ! »
E-pad er predeg-sé,

Ged er bleiz didruhé
En azen oé bet taget.
Ha rag-sé me 'gred mé
Red é um sekour perped
En eil hag égilé.

Er yar présiuz

D'er liésañ en dud ne hrant 'meid koll amzér
E klask gounid en oll madeu ;
Er merk a gement-e, m'her havo én istoér
Em-eus kleuet ged un tadeu,
A-zivoud d'en dén-hont, mestr d'ur yar présiuz,
Ur yar hag e zozve, nag un dra burhuduz !
Uieu milén avèl en eur :
« Diaoul braz ! emé en amoed peur,
Er yar-men, hañval é genein,
E zo un trézol kaèr enni. »
Ha deit choñj dehou d'hé lahein ?
Mez eañ e goll é léh gouni²²
Rag é boelleu er yar, allaz ! nitra ne oé
Nameid er péh e zo ér yér arall eùé.

*Aveidoh-hui, tud diaviz
E zo téchet d'en avariz,
Chetu, mar karet profitein,
Un tammig furnéz de brénein.
E-leih a dud é bérr-amzér
E zo koéhet don er vizér.
Perag émant èl-sé koéhet ?
E klask boud pinùig ré abred.*

²² gouni : gounid.

Er hroédur hag en néh estig

Cheru eañ dein, en néh estig,
E oen gwerso doh her spiein.
Me wél a-barh tri, pevar éinig :
En taol-men alkent emant dein !

Kaer eh-eus krial ha fichal,
Me lapoused, nitra ne hret.
Ha me dehorn penaoz neijal ?
N'eh-eus chet hoah pluenn erbed.

Mez n'en dé o mamm e gleuan
E huanadein lan a dristé ?
Ya, chetu o zad e wélan
E neijal amen e-taldé.

A zivréh me mamm p'en dehé
Unan bennag fall d'em skrapein,
A dra sur merùel e hrehé
Me mammig peur dré fin ouelein.

Ha mé genoh me lammehé,
Estig noz, ho pousinigeu ?
O ! pas. Ne vein ket didruhé ?
Ne vein ket bouar doh ho klemmeu.

Chetu ho pousined tinér.
N'em-eus groeit droug erbed dehé.
Gwarnet int genoh pèll amzér
De hortoz ma helleint balé.

Disket dehé, kanour hemb par,
Ged ho poéh dous perped neùé,
Kanein èloh er hoédeu klouar
Eid stréùein ér vro leuiné.

Ha pe vein é klask gwaskedenn,
Me 'yey liéz é-pad an hañv
De zichuéh édan ur huébenn
En ur cheleued doh o han.

Un êlig deit àr en douar

Ur braùig a groédur e oé
Emmanuel er Malardé
Ged é vlèùigeu ker milén
E zichenné betag é gein !

N'en-doé ket hoah pemp plé ollig ;
Mèz deustou ma oé bihanig,
Ne gavé plijadur ha joé
Meid é pedein en Etru Doué.

Liéz e vezé deulinet,
E zornigeu getou joentet,
E zeulagad saùet d'en Néañ
Ar un dro ged é galon hlan.

P'her gwélent é pedein èl-sé,
E dad hag é vamm e laré :
« Ur hroédur e zo hemb arvar
Un êl dichennet àr en douar. »

Allaz ! Emmanuel bihan,
Un dé bennag 'chomas klañv.
E-pad é glinùed n'arsaùé
A lared : « M'ho kar, o ! men Doué ! »

Jezuz, Mari, anèu ker mad,
E oé kleuet getou dalhmad.
Ne choñje mui, hañval e oé,
Namedi én Neañ, nameid é Doué.

Mez en un taol é fas e splann,
E zivougenn e zo gwenn-kann.
Hag en douar-men en êl bihan
En-deus néijet én-dro d'en Néañ.

En êl hag er hroédurig

E-tal kavell ur hroédurig,
Un êl dichennet ag en Néañ
E laré : « Kroédur, mem brérig,
Ennoh me limaj e wélan.

Me wél en hous inean tinér
Braùité en Néañ é splannein,
Kuiteit en douar-men a vizér,
O ! kroédur glan, ha deit genein !

Ya, deit genein d'er vro euruz
Léh ma vé perped leùiné ;
Deit genein de wéled Jezuz
Hag en Intron Vari, mamm Doué.

Più ouér, mar det ha chom pelloh
Er be-men lan a fallanté,
Più oér petra 'vo ahanoh ?
E-léh ur sant, un diaoul marsé !

Bugalé em-eus anaùet
E oé glan èl-oh gwéharal.
Hag émant hiniù kousiet,
Emant hiniù deit de voud fall.

O ! kroédurig bremen ker braù,
Perag chom é bro er péhed ?
Deit de vous euruz hemb arsaù
Er Baradouiz ged en êled.

Ho tad, ho mamm e ouilo deoh,
Mez hui e bedo aveité.
Hag int e vo devéatoh
Genoh é-tal en Eutru Doué. »

ErHroédurig e varù neuzé ;
En êl e gemér é inean
Eid e gas getou devad Doué...
Un êl ohpenn e zo én Neañ !

Notenn gand Embann an Hirwaz : meur a varzoneg a zo kristen ha kristen, bet savet anad gand eur beleg.

Un aviz mad

A ribl ar Skorv é bro Kléger
E vihùé, boud zo pèll amzér,
Ur labourér Jozon anùet.
Pinùig a dra sur ne oé ket,
Med euruz neoah um gavé
Ged é voéz hag é vugalé,
Rag é labourad é dachenn,
Donzed e hrée bep plé de benn
A cherrein blankigeu mad
Eid biùein êz en é stad.
D'an Oriant, Jozon, un dé,
E yeas d'obér un dro valé,
Kleuet en-doé komz liéz mad
Ag un eutru, un alvokad
E ré avizeu fur bamdé
De bep unan he atersé.
Hag añ oeit eùé d'her habed :
« Deùeh mad ! eutru, emé eañ,
Penaos ema ho yéhed ? »
Hag en eutru e reskont béan :
« Mad, mad, keméret ur gadoér,
Ha komzet dein ag hous afer
Eid petra é oh deit amen ?
Eid ur proséz bennag marsé ? »
« O ! pas ; biskoah betag bremen
N'em-eus ket mé, trugéré Doué,
Proséz na chikan doh hani. »
« Med, me hêh dén, cheleuet mad,
N'eh eus nitra de ziloui ?
Nitra de rannein ? de blênnaad ? »
« O ! nann, eutru, en treu e ya
Ag en dibab genem perped. »
« Eid petra é oh deit enta ? »
« A ! fé, dam, eutru, n'hellan ket
Dirakoh devizein erhad,
Med deit on de houlenn genoh
Ma reet dein un aviz mad. »
« Avid petra ? Avid dizoh
Ged ur labour ? ged un afér ? »
« Ha me oér-mé ? Ar er papér
Lakeit er péh e gareet.
Un aviz mad, nitra muioh.
Ha goudé n'eh eus 'meid lared
Pégement e zeliéin deoh. »
« Ag er choéj », e lar en eutru :
Hag eañ e gemér papér ru'
Avid skriù diù pé teir linenn
E zo reit de Jozon a-benn.

« Chetu, emé eañ, ur skouid é. »
Er labourér e bé ged joé,
E cherr er papér présiuz
Hag eañ d'er gêr kontant, euruz ?
P'en dé arriù en é dachenn,
E veùél e houlenn getou
Mar dér de charrein er foénn :
« Gortoam entrenoz, ka !r e vo
E lar er vestréz ; chuéh on-mé. »
Eldi é lar er vugalé.
Jozon ne oér penaoz gobér.
Mez eañ e denn é damm papér,
Hag e lar d'er vestréz : « Sellet
Petra e zo a-barh merchet.
En Oraint em-eus bet eañ
Ged en alvokad abillañ ;
Ur skouid em-eus reit aveitou.
Sur eh-eus treu mad àrnehou. »
Er voéz e denn hé luneteu
E oé én o bouistr àr en daol,
Ha chetu amen er gerieu
E lenn neuzé dirag en oll :
*« Un dra eh-eus amzér
Hiniù memb d'her gobér,
Diwallet a hortoz,
D'he gobér entrenoz. »*
« Groam, emé Jozon, groam a-benn
El ma teviz dem er papér ;
E-raog en noz cherram er foenn,
Dam d'er labour hemb koll amzér ! »
Hag er foenn e oé bet cherret
E-raog ma oé en hiol kuhet.
En dé àr-lerh é koéh glaù
Ag er mintin hemb arsaù ;
En douareu a bep tu d'er stér
E zo béet en berr amzér.
En deur braz e skléj a-yoheu
Oll er foenn chomet ér pradeu.
Ha Jozon e laré neuzé
D'é brid ha d'é vugalé
En aviz em-boé goulennet
N'em-eus chet eañ ré ger péet !
Ag er memb aviz ni eùé
Dalham choñj é-pad un buhé :
*Un dra un-eus amzér
Hiniù memb d'her gobér,
Diwallam a hortoz,
D'her gobér entrenoz !*

En deu vrèr hag er goukou.

boud 'zo é Breih mar a unan
Um laka de gredein
Ema chañsuz kleued kentañ
Er goukou é kanein.
Deu vrèr e oé un dé
Er park é labourad.
Du-hont, du-men, er gwé'
E gomañsé glasaad.
Hqag en éned pèll amzér mud
Tro-ha-tro e gané
Eid strèuein é-mesk en dud
Er joé, er leuiné.
Benn un herrad, chetu kleùet
Er goukou e kanein eùé.
Hag en deu vrèr o fenn saùet
E chom de cheleued neuzé.
« Genein-mé, e lar unan
Ema bet kleùet kentañ.
Me 'z ein enta de benn
A bremen me zachenn. »
« Her hleuet em-eus en ho raog, »
E lar en all, en eur gomz rok,
« Me jao e werhein mad enta
Dilun é foér Lomaria. »
Ha gwah d'er hoh chikan geté
Moned e hrant kent pèll goudé
De gavouid Barnour er hanton.
« Laret dem, elé int, laret
Più ahanom en-deus rézon ;
Laret eid più en-deus kanet
Er goukou tuchantig. »
« Eh an de rein deoh deoh ho koulenn,
Med gorteit un tammig »,
E eskont en dén a lézenn.
« Ag ho sakod de gentañ
Tennet ur skouid peb unan. »
Reit o-deus en deu chikanour
Peb unan é skouid d'er Barnour.
Ha hennen kentéh e chérr
En argant en é dilér :
« Er goukou, e lar eañ neuzé,
En-deus kanet aveiton-mé. »

Er jardrinour hag er vugalé

Ur Jardrinour d' é liorh-fréh
En-doé galùet bugalégeu ;
Ne oé kaérroh, bourrusoh léh :
A bep tu gwe' ged o barreu
Goleit ag avaleu milén
Ha gwe' karget a bér eùé.
Er Jardrinour n' en-deus chet poén
E lakaad oll er vugalé
De grog ér pér, én avaleu.
« Keméret, débret, e lar eañ,
Mez hep kargein ho fichedeu.
E-mesk er baotred vihannañ
Boud oé unan e daolé fréh
Ar-drest er harh liéz a wéh.
Getou e vé goulennet béan
Perag é hré en hoari-se :
« En tu 'rall er harh, emé eañ,
Chetu fréh e gavein goudé. »
Ged e gomz-men er Jardrinour
E zo én un taol sklêrdéret.
Deit choñj dehou ah er labour
E zo d' hobér eid boud salvet.
Ha eañ oeit ha lared kentéh :
« Me 'hrey eid me salvedigeh
El m' en-deus groeit er paotrig fur
Eid é vad hag é blijadur. »
Ha goudéveh, 'pad é vuhé,
El-sen e hreas é gwirioné ;
Gobér évreu mad muioh-mui
E oé bamdé oll é soursi ?
Ar-lerh peb unan anehé
Eañ e laré én é spered :
« A-drest garh "en éternité"
Chetu hoah ur fréhenn taolet,
Ur fréhenn e gavein goudé,
Ha pe vein arriù dirag Doué. »

En "trein' dihentet

Ar en hent-houarn un *train* bamdé
Ged trouz ha savar e ridé.
Krénein e hré en douar édan e rodeu dir
Hag àr en diù *railenn* moned e hré ged herr
E-pad ma oé gwelet avél ur seienn hir.
Ur vogedenn gwenn-kann e seùel én amzér
Un dé bennag ma oé der béannañ é rideg
Chetu eañ degoéhet ged ur prad boketeg
Ha deit er choñj dehou de guitaad é railleu
Eid moned de roulal é-kreiz er boketeu :

« Chuéh on, e lare eañ – selletpesort pennad : -
Ar en diù raillenn-mañ é hobé hent dalhmad.
Red é chañj mar a wéh ; bourrusoh e vo dein
E-mesk er boketeu moned èl ma karein.
Ha eañ oeit ha sailled ér-mêz ag é railleu !
Med allaz ! peb eil penn kentéh é vagoniou
Unan àr en arall e goéh hantér draillet,
Hag é-kreiz er vouillenn a-blad éma chomet.
Pegement a dud diskiant
El en trein-men e hra eùé
Ha pe zsitroant ag er gwir hent
Eid um daolein d'er fallanté !
« *Chuéh om, o-deus un dé laret,*
E héli hebt er vertuieu !
Ha chetu dehé keméret
Hent boketeg er faoz joéieu.
Mez er geih tud-men dihentet,
Hag eurved o-deus kavet ?
Nepas... Er)mêz a lézenn Doué
N'en-deus 'meid ankin ha tristé,
Rag sen eid boud euruz dalhmad
Dalham de héli en hent mad !

Notenn gand Embannen Hirwaz : anad eo an dra-ze kentel eurbeleg kristen.

Er rah a gêr hag er rah a ziàr er mêzeu

Ur rah a gêr en doé pedet
Ur rah a-ziàr er mêzeu
Getou un dé de zébrein pred
Eid tañoad biùañs er hêrieu.

« Me yey, e laras en arall,
Genein-mé n'en-deus ket grimeu. »
Entrenoz é oént én ur sal
Dirag un daol goleit a dreu.

Boud 'oé kig-beùin ha kig-rost,
Bara,fromaj, kateù er-hoalh
Hani àr er léh, hani tost.
Gelleid e hreent débrein o gwalh.

« Débram », e lar er rah a gêr
D'er rah peizant chomet bamet ;
« Krignam, chakam hemb koll amzér
E-raog ma tey en dud d'o fred. »

Ar en daol e saillant kentéh
Eid gobér inour d'er pladeu.
Mez chetu arriù er vatéh,
Ha saùet hwen én o chaocheu !

Peb unan e vrenchen a-herr
Eid klask un toull ér blañcheriz ;
'Hed bihan dra doh er vañgoér
E oé tpet en deu ostiz.

Rah er mêzeu en-deus kollet
Ur pennig mad ag é lost hir ;
Krénein e hra, hantér vatet,
Ha dohtou e gwad e zivir.

« Kenavo, kansort, emé eañ,
Eh an én-dro d'em sulér foenn ;
A-hoel du-hont ha pe zébran,
Mé hél prédein betag er penn !

Amen eh-eus biùañs hwékoh,
Mez àr un dro skont ha néhañs.
Gwéll é genein bouid distérroh
E hellan kemér hemb doujañs. »

En tu mad ag en neañ

En ur penher a Vreih-Izél
E oé treménet kours er goén,
Ha deit e oé en noz tioél
Ar-lerh un dé kaer e véhuén.

E-tal en trézeu en noz-sé,
Goudé ma oé achiù er pred,
Ur hroédur bihan a seih vlé
E oé ged é vamm azéet.

Kleùet e oé boéh er raned
E kanein du-hont ér predeu,
Ha muioh-mui en tioélded
E zichenné àr er mêzeu.

Trouz erbed én-dro d'ar penhér
Hag en Neañ e oé hemb kogus ;
'Benn un herrad chetu er loér
E tiskoein hé fas luguernuz.

Ar en-dro ged er loér eùé
Er stired um lak de splannein.
Boud e zo kement anehé
Ma n'heller ket o nivérein.

E zeulagad saùet d'en Neañ
Er hroédurig e oé bamet :
« O ! me mamm, sellet, emé eañ,
Na braùet é en Neañ, sellet ! »

« Memab, e lar é vamm dohtu,
Er péh e wélet a-drestoh
N'en-dé 'meid en Neañ a véz-tu ;
En tu mad e zo kalz braùoh. »

Er hroédur e chom pèll amzér
De selled en Neañ stirenneg.
De selled ged souéh en treu kaèr
En-deus groeit en Doué galloudeg.

Hag eañ e lar : « Plijet ged Doué
Ag er bed-men men galùein bean !
O ! ya, me mamm me garehé
Gweled en tu mad ag en Neañ. »

En noz-se memb, èl ma hoanté
E varùas er hroédur bihan
Ha Doué e hras dehou neuzé

Gweled en tu mad ag en Neañ.

Notenn gand Embann an Hiwraz : souzuz-kenañ mennoziou ar beleg kristen-ze !

Er mambreu hag er galon

E korv mab-dén un dé brezél e oé saùet.
Er Mambreu d'er Galon e laré kounnaret :
« Chetu ni a werso doh ho magein bamdé
Ha hui ne hret nitra 'meid dichuéh noz ha dé !
Perag er boén dem-ni
Hag er repoz deoh-hui ?
A-dal hiniù, klasket
Ho piùañs, mar karet !
Na bremen na dévéhatoh
Ne vennam mui rein nitra deoh. »
Ha kentéh en deu droed
E arsaù de gerhed ;
En dehorn chomet arhoareg
Ne gasant mui er bouid d'er beg.
Mez petra e zegouéh goudé ?
Embér, àr-lerh deu pé tri dé,
Er Galon hemb biùañs erbed
Ez a de voud gwannoh perped,
Hag er Mambreu neuzé
Deit de vous gwan eùé
'Benn er fin en-deus komprenet
Penaoz er Galon beur de boéz ne chomé ket,
Mez labourad e hré ataù
Rag ged eur bouid e reseùé
Ne hré 'meid stréùein hemb arsaù
Er horv a-béh nerh ha buhé.

Maleuruz un tiegeh !

Maleuruz ur ranteleh !

Mar n'en-deus peah ha karanté

Etré en dud e zo énné.